

# VA ANO EO AR PUBLIKAN

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

*♩* ≈ 100

O Ma-ze deus d'am heul, Sao a-le-se ha lez pép tra:  
O Ma-ze! Deut on 'vid ar paour-ra!

1. Va an-(n)o eo ar pu-bli-kan A C'ha-li-le!  
2. Mal-tou-ter oan en eur bu-reo Ha gwe-let fall.  
3. Ha Je-zuz 'zo cho-met a-zav E-vi-don-me  
4. Ha me rak-tal war-zao da vond Be-teg en-nañ,  
5. Dis-ki-bien Je-zuz 'moa pe-det Tro-dro d'an daol;  
6. Ar Skri-bed o sel-led gand kas N'oant ket 'n o bleud

1. Em bu-ez n'oa ket plas d'ar c'han N'o-an ket pri-zet gand Dou-e!  
2. Ni n'om med lae-ron, d'o me-no, Dis-pri-zet gand an oll dud all.  
3. Hag ou-zin 'neus sel-let gand joa: "Va breur Ma-ze, sao a-le-se!"  
4. Ha d'e be-di dious-tu da zond Da zre-bi lein be-teg du-mañ.  
5. Mi-gnon-(n)ed din, pu-bli-kan-(n)ed A oa i-ve gan-(n)eom ouz taol.  
6. Ha Je-zuz de-zo 'la-va-ras: "Vid ar be-he-rien eo on deut".

**Diskan :** O Maze deus d'am heul,  
Sao alese ha lez pép tra :  
O Maze!  
Deut on 'vid ar paourra !

- |   |  |
|---|--|
| <p>1. Va ano eo ar publikan<br/>A C'halile !<br/>Em buez n'oa ket plas d'ar c'han<br/>N'oan ket prizet gand Doue !</p> <p>2. Maltouter oan en eur bureo<br/>Ha gwelet fall.<br/>Ni n'om med laeron, d'o meno,<br/>Disprizet gand an oll dud all.</p> <p>3. Ha Jezuz 'zo chomet a-zav<br/>Evidon-me<br/>Hag ouzin 'neus sellet gand joa:<br/>"Va breur Maze, sao alese!"</p> | <p>4. Ha me raktal war-zao da vond<br/>Beteg ennañ,<br/>Ha d'e bedi dioustu da zond<br/>Da zrebi lein beteg du-mañ.</p> <p>5. Diskibien Jezuz 'moa pedet<br/>Tro-dro d'an daol;<br/>Mignoned din, publikaned<br/>A oa ive ganeom ouz taol.</p> <p>6. Ar Skribed o selled gand kas<br/>N'oant ket 'n o bleud<br/>Ha Jezuz dezo 'lavaras :<br/>"Vid ar beherien eo on deut".</p> |
|---|--|

MON NOM C'EST LE "PUBLICAIN"

R: O Matthieu, suis-moi, Lève-toi et laisse tout : O Matthieu ! Je suis venu pour le plus pauvre !

1. Mon nom, c'est le Publicain De Galilée ! Dans ma vie, pas de place pour le chant, Car je ne comptais pas pour Dieu.
2. Dans le bureau, je percevais les impôts Et j'étais mal vu. D'après eux, nous ne sommes que des voleurs, Tout le monde nous méprise.
3. Et Jésus s'est arrêté Pour moi. Avec joie, Il m'a regardé : "Mon frère Matthieu, lève-toi !"
4. Je me mis, tout de suite, debout Pour aller vers Lui Et je L'invitai aussitôt A venir prendre son repas chez moi.
5. J'avais invité, autour de la table, Les disciples de Jésus ; Des amis à moi, publicains, Étaient aussi à table avec nous.
6. Les Scribes, au regard agressif, N'étaient pas contents Et Jésus leur dit : "C'est pour les pécheurs que je suis venu".